



HISTOR ADMIRABL

*juste en ar*  
DEMEUS AR BOUDEDEO,

*Pehini abaque maro hor Zalver ne ra nemet bale  
nos ha deiz ac'han da sin ar bed, abalamour  
d'an affronteri en devoa bet en undret hor  
Zalver, pehini, pa vou o vont d'ar maro, a  
salvezas dezàn disquiza var e stal, hac e teuas  
d'en rebuti evel eur scelerat.*

*Var ion : Guerz Santez Anna.*

**A**SISTANTER enorabl, didostait da glèvet  
Ar vuez ar pitoyapla, mar boe biscoas er bed,  
An histor zo truezus demeus ar Boudedeo,  
Zo nos ha deiz o vale aboue hor Zalver maro.

Eus a dribu Nepthali, a guêr Jerusalem,  
Voa ganet Absarius, ententet, christeuën;  
Dont aravar ar bed-mân en amzer m'oa Herodes,  
A salvezas massaci Jesus, mab ar Vere'hes.

Vazad a voa eur e'halvez, va mam gemenerez,  
Hac a laboure en templ ebars en broderez;

*Handwritten notes and signatures at the bottom of the page.*

Ha va c'herent am desqas da len e leor al lezen,  
Hac ini ar brofetet ivez a dra certain.

Goude e voen demezet gant vac'herent d'ar fin,  
Da eur vreg fur ha prudant a dribu Benjamin,  
A bini'm boe tri buguel bars en amzer ma teuas  
An Autrou Sant Yan Badezour da brezeg ar  
Messias.

Sant Yan a gonvertissas calz eus a bayanet,  
Pere voa idolatret, caledet er pec'het;  
Dec mil den en un devez en devez bet badezet,  
Me, va greg, va bugale e voamp bet o velet.

Va greg a lavaras din : va fried, emezi,  
Leqomp en eur vadezi, ennont eo ar Messi;  
Ha me lavaret dezi, gant un ear direspert:  
Na ni nac hor bugale ne vimp qet badezet.

Da ben eun nebeut goude, Sant Yan voe  
dibennet,  
Dre urz roue Herodes, un den cruel meurbet,  
Ha ma teuas hor Zalver evit rena en e blaç;  
Hac a ras, dre ar c'hanton, calz a viraclou bras.

Güelet e meus bet Jesus alies o sermon,  
Hep ne meus bet profitet eus e bredication;  
Va-unan e voan presant p'en devoa rassaziet  
Dec mil den gant pemp bara ha goudese pesqet.

Me, Boudedeo maleurus, a velas c'hoas  
souden

Jesus o ressuscitè Lazar, breur Madalen,  
 Ha güelet dibosedi calz eus a dud possedet,  
 Ha, siouas din, pec'her bras nemeustam profitet.

Daben eun nebeut goude voe Jesus qemeret  
 Gant calz deus a judevien er jardin Olivet,  
 Ha condaonet gant Pilat neuze o rançout douguen  
 Ar groas ponner ha mezus eyit ar bec'herien.

Pa voe ar groas achuet, d'hor Zalver voe samet,  
 Da vont da venez Calyar da veza crucifiet :  
 Ovelet an dud o redec, me a guemer ya buguel,  
 Ha me mout da dal an nor d'e velet o tremen.

Cetu Jesus o tremen neuze abiou va zi,  
 Pehini en tal va stal a deu da reposi,  
 Ha me alaras dezàn, gant ur gomz goal arrogant :  
 Qê alesse eus va stal, te zo eun den mechant.

Ganet oun disenoret gant da effronteri,  
 Pa quelàn o reposi amàn e'tal va zi :  
 Qerz alesse, den ingrat, tam cos sorcer milliguet,  
 Qerz alesse d'ar maro, pa c'heus he meritet.

Jesus a respontas din, gant ur vouez truezus :  
 Montia ràn da bartia, den fall, den maleurus ;  
 Me riposo gant va Zad, mes te valeo bepret  
 E pêvar c'horn ar bed-mâ, ac'han da fin ar bed.

Certen te a valeo ac'han d'ar jujamant,  
 Hac en tu deo d'am Zad am gouelo suramant  
 O varni ar bec'herien pere a vo condaonet

Da vont d'ar flamou gries, ar re just d'ar joaüstel.

Pa glêvis comzou Jesus, vac'halon voe touchet,  
Ma rois neuze souden va bugale d'am pried,  
Ma velis ar Veroniq o sec'hi bisach Jesus,  
Ma chom en he mouchouer e bortret truezus.

Hep gallout n'em arrêti e heuillis hor Zalver,  
Ilac ma velis va Jesus ha calz graguez santel;  
Arbourvien d'ar Verc'heso deveus bet lavaret:  
Cetu amâ an tachiou ma vo ho Mab staguet.

P'amboe guelet hor Zalver o vervel var ar groas,  
E creizetre an daoulac gant calz aboanniou bras  
Ha me commanç va beach gant calz demeus a  
anqen,  
O tont da laret adieu da guær Jerusalem.

Comprenit oll, Bretonet, peguement a c'hlac'har  
En deus ar Boudedeo bremâ var an douar!  
Rancout quïtat e gartier, e vreg hac e yugale,  
Hep qimiadi diouto, evit atao bale.

Pa en devoe baleet eun nombr a zeveziou,  
Ec'h êruas en Egypt, pell bras demeus e vro;  
Ene emâ ar Môr-Rus, elec'h ma voe tremenet  
Moyses gant pobl Doue, hep cavout drouc ebet.

Mont a ris eus ac'hane da enezen Candi,  
Elec'h emedi en noaz an dud a zo enni;  
Eno e velis eun tad voa o trec'hi a damou  
E vere'h evit sacrific da rei d'o doueou.

Montaris da Malhodo, elec'h mazeu tuddrol,  
 Pere a ador Doue hac ivez an diaoul;  
 Pedi a reont Doue da rêi dê prosperite,  
 Hac an diaoul a bedont na rai qet drouc dêze.

Güelet ameus er Japon ur vam meurbet cruel,  
 Pini' denas da laza, siouas, he daou huguel,  
 Er vrô-ze co permetet dont da laza'r vugale,  
 Pa ne deus qet a vara ar vam da rei dêze.

Goude' qemerisan hent da vont d'an Enezi,  
 D'an Ameriq, d'an Asi, hac ive d'an Turki.  
 Ar graguez eus ar vrô-ze a vale oll d'an arme,  
 Hac an ezac'h o deus soign demeus ar vugale.

Eno emedi ar c'his da laza ar botret,  
 Nemet unan e peb famill na ve james miret.  
 Bez' o deus ur rouanez hac a ro comandant  
 Da laza tout ar malet, hep caout dê nep damant.

Erguæreusa Ganioreusur c'his drol meurbet,  
 Rac eno an dud yaouanc, pa vezont eureujet,  
 E ranco ar plac'h nêve, an nôs qenta he eured  
 Mont da gousqet gant ar prinç, vit beza enoret.

Bet on ebars en eur c'hoad hanvet Cisaria,  
 Elec'h ma eller bale cant leo d'an nebeuta  
 Hep cavet dour da eva, na nep feunteun, na  
 rivier,

Arpez zo goal incomod da oll dud ar c'hartier.

Monet aris c'hoas pelloc'h, d'arguæra Vosopa;

Pini zo eus e divoal ar prinç a zo énnâ,  
 Eur vanden chass ha merc'hed en devez evit goardou,  
 Ha n'en deus qen soudarded evit difen e vro.

Ac'hane e c'his d'eur guær zo hanvet Estopet,  
 Elec'h mazes serpaniet ha loëued vil meurbet,  
 Zo qer teo ha corf eun den, assur ma vent mezuret,  
 O devez, d'an nebenta, daou-uguent troatad het.

Er spaç demeus a gant vloas ez òn bet o vale,  
 Ha me êruout adare em bro hac em c'hontre:  
 Ne velis pelloc'h eno va greg na va bugale,  
 Na den ebet eus va bro certain n'ani anavee.

Neuze e teuis da Rom ebars en Itali,  
 En amzer-ze e voa calz eus a c'hlac'har enni,  
 E velis merzeria nombr bras eus a Gristenien,  
 En defot na renoncent d'o feiz ha d'o lezen.

Me a vale var ar môr coulz ha var an douar,  
 Ha me partia neuze evit ar Franç, brô rar:  
 E Marseill, Bourdel, Paris, Carcasson, Naonet, Lyon,  
 Ac'hane da Vreiz-Izel, d'ar guær vrao a Roazon.

Güelet e meus Montroulez ne voa nemet eur c'hoad,  
 Ha güelet Brest ha Qemperebars en douar prat,  
 Ha güelet ar guær a Is ebars he frosperite,  
 Hac ar guær a Lexovi a meus güelet ive.

Me meus güelet Breiz-Izel en coad ha menezion,  
 Ma zoat evel sovajet neuze ebars er vro;  
 Me a vel calz a guæriou bars er vro-ze batisset,  
 Bremâ me vel cheuchamant abaque ma zôn bet.

Me vel ar guær a Roazon eur guær gaer, hatisset,  
 Dol, Guenet ha Sant-Malo, Dinan hac an Naonet,  
 Sant-Briec ha Landreguer, Lannion ha Montroulez,  
 Castel-Paol ha Lesneven ha Landerne ivez.

Arc'hærjoui-zemeusgnelete coad hac e prajou:  
 Pa deuis d'ober va beach qenta ebars er vro;  
 Cetu hatisset Qemper, Brest, Guipavas, Recouvranc,  
 Qemperle, Moelan, Kerahes ebars en assurance.

D'ar fin, pa zon condaonet gant Doue da vale,  
 Me zo bet en em gavet e creiz meur a arme;  
 Canoliou ha fusuliu, cleze coulz ha sabrennou,  
 Netra ne deo bet capabl da rei din ar maro.

Bet on ebars e listri a zo bet perisset,  
 Hac an dud a voa enne a meus güelet beuzet,  
 Ha me hanvet Boudedeo me n'am bije drouc ebet:  
 Comzou Doue a renço beza accomplisset.

Condaonete zongantàn dachom var an douar,  
 Comprenit oll, christenien, hemàn zo din glac'har:  
 Va zourmanchou er bed-mâ birviqen na echuo,  
 Qen a deui Doue da varn ar beo hac ar maro.

Ar som eus abempguenec zo em godel hepret,  
 James gant nep sort clêvet me ne dòn attaqet;  
 Bet on ebars en broyou elêc'h ma zoa ar vocen,  
 Hep na zeus staguet ouzin na clêvet nac anqen.

Va boutou na va dillad james na uzont qet,  
 Dre bermission Doue am eus bet offancet;

Peder güech meus redet dre bêvar c'horn ar  
bed-mân,

Ha güelet a meus ive calz chenchamant ennân.

Brema ez òn commancet da redet ar bempet;  
Hep ne don ambarasset gant dibri na cousqet;  
Güelet a meus bet broyou a zo bet oll ruinet  
Ha calz demeus a guêriou gant ar gurun dêvet.

Ne meus qet calza amzer evit chom da barlant,  
Me a gred e mâ va zreid var gore glaou ardant;  
Nan, ne zeus nemet Doue a elfe sur disclêria  
Ar boaniou bras a souffrân qerqent ma repozan.

Pebes maleur eo din-me beza bet rebutet  
Demeus a guichen va stal Jesus! Salver ar bed  
Pa voa o vont d'ar maro da zonet da zisqüiza,  
Ha me neuze dre valeur a zeuas d'e zispriza.

Hamân eo ar maleur brase meus var ar bed-mâ,  
Emaon bepret o vale ouspen triva e'h cant yla,  
Ha e'hoase ranqân bale ac'han da ben lin ar bed:  
Pedit Doue evidon, ma zin d'ar joaüistet,

F I N.